



PLAC'H MANKET

Var eun ton trist.

Selaouit breman va mouez, o va c'hamaradezet,
C'houi pere em yaouankis, a meus bet kals karet,
Eus a Doullie all Ludu, me ra deoc'h ma c'hlemmou,
Deut holl assemblez ganin, da veski ho daelou.

Me a meus kollet breman va reputation,
Va c'halon a zo karget a zezolation,
Dre ma meuz kredet, siouas, va faoz kamaradou,
E meuz kollet ar c'haera demeus va bokejou.

Beteg breman me c'halle laret a voues huel,
E oan kaera fumelen e oa e Breiz-Izel,
A breman me zo udur etouez an holl verc'hed,
Pa eo va c'haera bouket sioas gan-in kolet.

Hennez oa kaera tenzor e oa bars ar bed man,
Ne kavin ket eneb leac'h, da brena seurt d'ez-han,
Dre veza deut da gredi kamaradet treitour,
E meus lezet va boket da vonet gant an dour.

Pa dean d'examina ar voul rond deus ar bed,
Sioas me wel varnezhi breman kalz a verc'hed
Pere zo kollet gante koulz a me ho rozen,
O veza deut da fiout en komzou treitourien.

Va holl gerent zo sioas gan-in dizonoret,
Va chans a zo dinatur, va flaneden kollet
Va c'halon zo en hirvoud, kouls en noz vel en de,
Me a c'houlén ar maro, vit disken bars em be.

Goude va frajilite, me zo holl ankeniet.
E kompren bars er stad-trist, e pehini on rentet,
Beteg breman me meus bet douget kokardeno,
Breman e meus eur bizac'h, eur vaz da vont en dro.

Beteg an oad ugent vloaz, me a meus bet bevet
Ebars e doujans Doue, evel ma vez gleet,
Neuze me a oa karet gant an holl em c'hanton,
Neuze, kamaradezet, oa laouen va c'halon.

— 4 —

Goudeze me meus bet heuliet, kouls en noz vel en de,
 Ar gwall kompagnunez a zo bars ar c'hontre,
 Dre ze me zo meprizet ebars en Breiz-Izel,
 Ma evurustet, er bed-man, zo eet gant an avel.

Ne meus ket heuliet sioas, avis na tad na mam,
 Dre-se ne meus ket gallet beva ive divlam,
 Greet a meus skouarn vouzard pa gleven anezhe.

.....

Lavaret zo bet din-me gan he sur aliez.
 E heul gwal kompagnunez, mije tristidiguez.
 Mes tre ma oan c'hoas iaouank, veprisen ho c'homzou
 A ve ra din-me breman skuil eur mor a zaelou.

Ma mije bet o c'hredet, heuliet ha gourc'hemen,
 Va buez, kamaradezet, e vije bet laouen,
 Mes pa ne meus ket sented breman demeus ar stur.
 Allas vit deus ar garek, e rankin ober zur.

Noz a de he m'hon en eur stad trist meurbet,
 Awechou me eun tam da zebri gweach all ne me ket,
 Goude ma ve erc'h ha scorn, ha ienn bras an avel,
 Keunneud ne mo ket d'ober tan da doma va buguel.

C'houi, va c'hamaradezet, goude va holl anken,
 Deuiio c'hoas d'an goapaad, gand eur galon laouen.
 Mes mar kemerit an hent, en pehini zo danger,
 C'houi a pezo evel d'hon da zougen bec'h pouter.

Allas ! kamaradezet, daou hent zo er bed man.
 An hini gemer an hent mad, deus da zougen bec'h skan.
 N'hep gemer an hini fall, bale war va ronjou,
 Deus eur pouter da zouguen ha kals ar dourmanchou,

Vit war va chouck breman, a zo eur bec'h pouter.
 Hag a meus deus e zougen, kals a boan a miser.
 Dalc'het vezin d'er dougen beteg fin ma deiou
 Adieu'ta d'am yaoumanskis, ha d'an plijaduriou.